

10.

En deiziou se a bardon,
 Eus a Dreguer ac a Venet,
 A Guerne ac a Leon
 Er Guergoad cals tud a velet,
 Araoc ar brocession
 En o dorn goulou allumet ;
 Miraclou sclear ac anad,
 A batrones ar Guergoad.

11.

Sul goud' an Assomption
 Coëssait a communiët
 Gant er guir gontrition,
 Pardonet vò deoc'h pep pehet.
 Gonde gant devotion
 Er chapel gaër ma daoulinet,
 Ma livrit pemp Pater,
 Oc'h eus induljansou plenier.

12.

En-hi so eur Vreuries
 Eus a Bassion or Salver,
 A Vari, mamm a drues,
 Gant an induljansou plenier,
 Evit var fin ar vues,
 Pa vezo ker bras an danjer,
 Ma teuint da gonforti
 An den en e angoni.

13.

Merc'h pur d'an Tad eternel,
 Mam da Jesus-Christ on Otrou,
 Pried d'ar Spered-Santel,
 Assuret eus o faveuriou,
 Gant fians en o chapel
 E visitimp oc'h oteriou.
 Ia, or mam dous a mad
 Ni o kuelo er Guergoad.

Imprimatur :

18 Juillet 1860.

DE LÉSÉLÉUC, Vic. gén.



CANTIC

EN HENOR

D'AN ITRON VARIA A GUERGOAD

1.

Ma-ri, guir vam da Zou-e,
 Rou-a-nes meur-bet gal-lou-dus.
 Var an dou-ar ac en Eê,
 Mu-ia ca-ret o mab Je-sus:
 An oll dud oc'h an-a-ve
 E-vit o mam ga-ran-te-sus,
 A ni, dreist oll pobl cri-sten
 A bar-rès Que-me-ne-ven.

Kemper; moulet e ti de KERANGAL.

2.

Er chapel eus ar Guergoad,
D'oc'h gant hon tadou cos savet,
Gant an nep o car erfad
Bepret e zoc'h bet henoret ;
Kersomp ta, kersomp timad,
D'ar chapel se evit gaelet
Mari, feunteun a c'hrasou
A guir vam a viraclou.

3.

Var an douar e deus bet
Digant e Mab e goulennou ;
A petra n'obteno quet,
Savet var en tron enn Evou ?
Pedit-hi ta gant acket,
Discleriet dei oc'h isomou,
Ac e santot, eb dale,
E gallout dirac Doue.

4.

Pet gaelec ac e pet feson
Ne deus hi quet roet mercou
Demeus e frotection
D'an nep a rea disi veou ;
Dre e intercession
O deus oll bet o goulennou,
Ar re vouzar, ar c'hlevet,
Ac ar re zall ar gaelet.

5.

Tud o isili dalc'het,
Abaoue niver bloavesion,
A zeu e iebet parfet
Da accomplissa o veou ;
O zeot na baoues ket
Da rei pep seurt meuleidiou
D'ar Verc'hez dous a tener,
Bet ker mad en o c'henver.

6.

Goazet, merc'hed a groage
Prest da vervel o tivoada,
Pront a zo rentet pare
Goestlet d'an Itron Varia ;
Re all exposet ive
Da en tan goall ar spontussa
Dre sicour Mari, buan,
Zo preservet dioc'h an tan.

7.

Pet d'ar maro exposet
E creis ar maro, e creis an dour,
Er Guergoad o deus cavet
En dorn gallouduz do sicour ;
Bepred e vo selaouet
Ar pinvidic ac ar paour
A bedo a galon vad
Ar batrones a Guergoad.

8.

Ne oufe biken lagad
Enoui o consideri
Ar chapel eus ar Guergoad,
Consakret d'ar Verc'hez Vari ;
Tu a ro a galon vad
Offransou evit e orni ;
Ne aller nemeur gaelet
Er chapel caeroc'h savet.

9.

Da zul ar C'hasimodo
Piou a oufe niveri
Peguement a dud a so
Er chapel gaer ma o pidi ?
Dreist oll piou a lavaro
An niver a hobl a so en-hi
D'ar sul varlec'h anter east
Ac eus a bell ac eus a dost ?